


Kantik nevez

ar Mor



—→→→ *Sauter*

War doue :

—→→→

“Eun Doue a zeu d’ho kervell”

—→→→

17 — Kristenien a zeu d’hon aotchou
Da glask peoc’h ha didor
Savit uhel ho kalonou,
Dirazoc’h mister ar mor!

18 — Diwallit diouz pep hudurnez
A ziskar gened an den,
Heuilhit seder hent ar furnez,
Grit enor d’ho feiz kristen.

19 — Ho pedenn neuze a zavo
Betek kador an Aotrou,
E vennoz warnoc’h a baro,
Sevenet ho koulennou.

*
**

20 — « O Krist c’houi a c’helle kerzout
War gein an tarziou diroll
Ha gant eur ger dre ho kalloud
Terri nerz an avel foll.

21 — « Krist a rea d’ar rouejou
Reuda gant o bec’h pesked,
Renevezit ar burzudou
Great war lenn Jenezaret.

22 — « War mor ar vuhez gwarezit,
Ni ho ped, braz ha bihan,
E penn ar veaj digorit
Porz an nenv da bep-unan ».

Aotre da voulla
Kemper 27-6-1970
V. FAVÉ
Eskob skoazeller

Da C’houel Yann
24 even 1970
F. GUIVARC’H
Beleg

Anwez

1 — Nag ez omp eüruz, Santegiz :
Douar prim da labourat
Ha da noz evit hon diskuiz
Ar mor braz d’hon luskellat

*
**

2 — Krouet gantan ar sklerijenn
Astennet bolz an nenvou
Doue ’rannas e diou lodenn
An douar hag ar moriou.

zeul

3 — Ar mor (eo) al Leor benniget
Aour ennan pep lizerenn :
Galloud Doue hag e spered
O lintra war bep pajenn.

*
**

4 — Eun Hent eo, frank da bep hini
En despet d’an avel yud ;
Ar mor n’eo ket eun disparti,
Eur voger etre an dud.

5 — Dre ar mor, hervez an Istor
Harluet hep ti nag oz
E touaras e bro Arvor
Ar Vretoned hon tud koz.

6 — Dre vor eus bet deuet beleien
Devet gant eun tan nerzuz
Hadet stank o deus kristenien,
Breiz-Izel vo da Jezuz.

*
**

7 — O mor warnot o lugerni
Gened an Holl C'halloudek,
Sellet ouzit, pebez dudi,
O vriata ar c'herreg.

8 — Paour gwiskamant ar rouanez
Disliv ar bleuniou koanta,
Te 'jench mantel dek kwech bem-
Ha bep tro kaeroc'h kaera. [dez

*
**

9 — Evidomp bizin ha pesked
A vil vern en da gerc'henn;
Ar boan hepken d'o c'hemeret,
Nep a grog a zo perc'henn.

10 — Da galon frank ha birvidik
Ne zell ket ouz ar madou;
Koulz d'ar paour ha d'ar pinvidik
Te' ginnig da denzorieu.

*
**

11 — Nec'h ho peus evit ho yec'hed?
It a-benn en avel-vor;
Raktal c'houi a vo nevezet,
Ho kalon krenv ha digor.

12 — Pe 'vo gourlenn, pe 'vo dazre,
D'ar reverzi, d'ar marvor,
Nag a bed a gav ar pare,
Gant gwir vertuz an dour-mor.

*
**

13 — Edro siouas eo an avel,
— Hen eo a zo da damall —
Ar mor evel eur c'hoariell
En em laka da finval.

14 — Setu hen oc'h eonenna,
An derved gwenn dishual
A red, a lamm uhelloc'h-uhella,
Ar c'houmoul a zo tenval.

cf. P.

15 — Eman breman ar wagennou
O toulla hag o virvi,
Fuloret, sounn o c'hribellou,
Bec'h a zo war al listri!

16 — Ar mor eo ar brasa Gwered,
Enni korfou diniver,
Ruillet dalc'hmat ha diruilhet,
Noz ha deiz hed an amzer.

oh!

*
**